


49 SON AR PILHAOUER

EUR ZON GOZ.

Allegretto.



Ma - ri - vo - nik 'zo di - me - zet Gant eur



c'hoz tam pil - haou - aer, Gant eur c'hoz tam pil - haou - aer, E Lo -



quef - fret ez eo ga - net, E Ko - ma - nant Toul - al - Laër.

DISKAN.



Foel, foel, foel, Va zam - mik ao - trou, Gant e stoub hag e bil - hou !

DISKAN

Foel, foel, foel,
Va zammik aotrou,
Gant e stoub
Hag e bilhou! (bis)

1

Marivonik 'zo dimezet
Gant eur c'hoz tam pilhouaer, (bis)
E Loqueffret ez eo ganet
E komanant Toul-al-Laer.

2

Antronoz dervez an eured
E oa foar e Landerne, (bis)
Ha va lapouz prim dihunet
Daô! ermez euz e vele.

3

Drailha ra eun hanter-pater,
Tâna ra e gorn-butun (bis)
Hag en hent gant e grog-pouezer
Da bourmen hed ar zizun.

4

Hed ar bloaz, kenkoulz lavaret,
'Vez atao o fedek bro, (bis)
Hag e lez e c'hreg glac'haret
Er gear da skuilha daero.

5

Pa vez echuet e droiou,
Teu d'ar gear atao mico dall, (bis)
Darb' oa d'ezan koll e vragou
E Landerne en deiz-all.

6

Pa deui karrik an Ankou
D'ober trouz dre ar vro-man (bis)
Monik a 'z aï var e roudou,
Hag her pedo d'e zamma.

7

Pa vo maro he zam aotrou
Ha lipet ganta e loa, (bis)
Monik elec'h lezer klemmou
A gano: « d'an toul ez a ».